

## CANTIC

# SANTES THECLA

*Pehini e deus eur Chapel en douar Lannuon,  
en parous Plouber.*

---

Tad Eternel, prosternet voar va daoulin,  
Me c'houl sicour eus ho Majeste divin,  
Da gomposi eur c'hantic spirituel  
En gloar Thecla, ho servicheres fidel.

Me ho suppli christenien a vir galon,  
Da seleo oll brema gant devotion  
Ar vuez gaër demeus a Santes Thecla,  
Guerc'hes santel ha Martyres er bed-ma.

A ligne vad, a raç an idolatret,  
Demeus eur gaër hac a so Icouñ hanvet ;  
En eur brovinc so hanvet Cilicia,  
E voe ganet an itron Santes Thecla.

Concluet voe gant he mam he demezi,  
Hac ar Santes a deuas da gonsanti ;  
Mæs arruout a eure neuze soudan  
En e c'hontre unan deus an Disqibien.

Pa voa Sant Paul, unan deus an Ebestel,  
 En Antioch o preseg an Aviel,  
 E tremenas dre ar vro a Cilicia  
 Hac o sermon e convertissas Thecla.

Inspiret voe abers an Autrou Doue  
 Da ober veu demeus he virginite ;  
 En gloar Doue hac ar Ver'hes beniguet,  
 Ar vœu voe gret goude ma voe badezet.

Ha hy d'ar guer, o tislerya franchamanit  
 E voa chanchet ha recevet badiziant,  
 Ha demezet da vab Doue eternal,  
 Ha na deuje birviquen d'en dilezel.

Pa gleo he mam e teu d'en em refusi  
 D'ar bromesse a voa gret d'e demezi,  
 E tepechas mont betec ar varnerrien,  
 D'accusi he mere'h abalamour d'he lezen.

Neuze souden e voe gret eun ordrenanç  
 D'he devi en beo, abalamour d'an offanç  
 He devoa gret, o renonç d'an idolou,  
 Vit adori Jesus-Christ hon guir Autrou.

Pa gleo Thecla penos e voa condonnet  
 D'eur supplic tan, he zeo bet en eun armet  
 Dre sin ar groas ; hac anezi e-unan,  
 Gant eur fe vras zeo en em daulet er tan.

Preservet voe deus ar tan dre eur miracl ;  
 Ne offanças n'hac he c'horf n'hac he diltat :  
 Rac eur glao bras a goezas neuze souden,  
 En confusion d'he mam ha d'ar varnerrien.

Songet o deus, pa na ellont he devij,  
Cass ar Zantes d'ar loened da zevori  
En eur c'havarn pehini a voa carguet  
A serpanetet, amprefanet ha leoned.

Pa voe taulet d'al loënet-se furius,  
E commañjont dre ur voez melodius  
D'he enori, cherissa gant carante,  
Ha da rei gloar d'he voue a virginite.

An dud cruel possedet gant diaoulou,  
Pa na ellont he laza dre dourmanchou,  
Dont d'he staga o devezs imaginet  
Ous daou eugen evit beza diframmet.

Al loënet-se voa sauvach hac anraget,  
Hac ouspen-se gant piquou lem poursuivet;  
Ha cousecoude biscoas na eljont ont  
Preservet voe gant Jesus, Mab da Vari.

Nombr bras a dud, pa voeljont he martyriou,  
A zistroas, o renonç d'an idolou;  
O prometi e recevjent badeziant,  
Ha pinijen evit ho buez mechant.

Neuze souden e voe ar Santes livret  
D'eun intanvez a voa eur vreg corrompet;  
Mes pa velas vertuziou bras ar Santes,  
E tistroas, hac e oll dud assambles.

Miraclou bras e devezs bet operet,  
En he buez en toez an idolatret;  
Pa voa carguet a noad hac a vertuziou,  
E voe galvet da eurusdet an envou.

Santes Thecla eo ar guenta martyrez,  
Hervez ma zeo rapportet en he buez ;  
Ar guenta eo a so bet martyrizet,  
Goude maro eus hor Salver beniguet.

An doctoret demeus an Ilis Romen  
O deus reglet ma vije gret eur beden  
Da veza rapportet en honor Santes Thecla  
Evit an dud clan en ho amzer diveza.

Pa vez aman an den clan agonisant,  
E rer peden da Zoue Oll-Buissant  
D'en dilivra, evel ma voe delivret  
Santes Thecla deus e foanniou diremed.

Santes Thecla a so partout henoret,  
Abalamour d'ar miraclou he deus gret,  
Hac a roas c'hoas dre ar bed universel,  
Enn oll Europ hac ivez en Breiz-Izel.

Mar oc'h eus c'hoant da c'houzout en pe feçon,  
E teuas genta Santez Thecla d'ar c'hanton,  
M'en discleryo dec'h hervez ma meus al lumier,  
Voa eun hermit e d'gassas d'ar c'hartier.

Voa un hermit deus a vro an Itali  
A deuas en Breiz da sevel eur Penity ;  
En paros Plouber e terminas e veach,  
Hac en Coat-Frec e savas e hermitach.

P'en devoa gret e groten hac e chapel  
En c'hars ar c'hoat en qichen troad ar c'hastel,  
E voe dediet en gloar Doue da guenta,  
Hac en honor d'an Itron Santes Thecla.

Ar gorrupcion demeus ar guell amzeriou  
A voa tremenet, ha nombr bras a vrezellioù  
En devoa collet memor eur plaç qer santel,  
Nemert ma chommas vestijou ar gos chapel.

Maes va Salver, pa voelas abandonet  
Eur plaç devot d'he vignones dedlet,  
A bermetas neuze ganti ober miraclou ;  
Bras eo an éclat demeus he bursudou.

Ar fondatour demeus a zouar Coat-Frec,  
Dre charite ha gant Doue inspiret,  
En deus qemeret interest Santes Thecla  
Ha roet urz evit lacât batissa.

Pedomp Doue hac an Itron Varia  
Evit ar fondatour demeus a Loc-Maria,  
En deus fournisset ar materiou reqis  
Ha necesser da vatissa eun llis.

Ar veleyen demeus a baros Plouber  
O deus requetet digant an Autrou Treguer,  
Ma tigorje an tenzor spirituel,  
Ouspen rei urz da veniga ar chapel.

Beniguet eo, ha roet induljançou  
D'an drivet sul demeus a vis guengolo  
Da guement den a deuyo d'he bisita,  
Da gass offranç, coves ha communia.

Penevert aon fatiga ho sperejou,  
Men a zisclerje en antier ar miraclou,  
A rer bendez, dre buissanç va Salver,  
Er chapel nevez, var bordic rivier *Le Guer*,

Ha couscoude emeuz c'hoant da zisclerya  
 Eur pemp pe c'hoec'h eus ar principala,  
 Evit discoë d'ar gristenien obstinet,  
 En deus Jesus madelez en hon andret.

Ervoan Jorant, demeus a baros Servel,  
 So bet pell amser gant eur boan vras ha cruel  
 En e c'houzoug, hep gallout cavet remed,  
 Abandonet gant an oll medecinet.

Inspiret voe da zonet d'en em voestla  
 A vouir galon d'an Itron Santes Thecla ;  
 Hac'o tonet da ramplissa he vœuyou,  
 E voe yac'hët ha terminet e boanniou.

Robert Henry, demeus a paros Plouber,  
 Guell affliget pell bras a voa a amzer,  
 En e ziou-c'har, hep remui na qerzet,  
 En danger bras memes d'o c'havet troc'het.

Qelennet voe gant tud fur eus ar c'hontre  
 D'en em voestla buan d'ar Santez neve ;  
 Casset e voe da visita he chapel,  
 Ha rentet yac'h dre c'hraç Doue eternal.

Eur femelen, hanvet Mari ar Gouales,  
 Deus a Blouber, a voa paralytiques  
 Voar e guele eur pell bras deus a amzer,  
 Hervez ma zeo rappørtet voar ar paper.

En em voestla a cure a vouir galon  
 D'ar Santes-man gant fe ha devotion ;  
 En eun taul ber a recevas ar yec'het,  
 Hac hep nep poan d'ar chapel e deus qerzet.

Adeüs Prat, demeure a bâros Kospès,  
En pad tri bloas so bet paralytiques ;  
Digasset voe da chapel Santes Thecla,  
Hac an cil guech e commanças divarcha.

Isabèl Even, eus a baros Tonqedec,  
Voar levr ar miraclou e deus discleryet  
Beza aboe pell amzer gant elnvet,  
En eur fêçon ma voa evel abandonet.

Clasq a eure sicourou ar vedecinet,  
Pere a ziscleryas voa marvel e c'hlenved ;  
Mes deut eo d'en em voestla da Santes Thecla  
Ha reutet eo bet yac'h o tont d'he bisita.

C'hoant a meus c'hoas, qen dont da finissa,  
Da rapporti eur miracl ar c'haëra,  
Pehini so c'hoarvezet, n'eus qet pell amzer,  
Gant Giletta ar Bras, demeure a Plouber.

Attaqet voe gant eur sort paralisi,  
Ma coenvas hep gallout e remui,  
Qen a songe d'an oll e voa decedet,  
Ma voe casset en hast da glasq eur belec.

Pa voa reutet en esperanç d'he noui,  
Dre brudanç e commanças d'he exorti  
Da rei he offranç da eur chapel devot benag,  
Dâ c'houl ous Doue ar c'hraç da govesat.

Neuze souden e tiscoezas dre signou  
Dirac an oll qement den a voa eno,  
Dont da rei he offranç d'ar Santes nevez gavet,  
Hac en un instant goude dre c'hraç e deus comzet.

Santes Theclâ a obtenas dezi ar c'hraç  
 Digant Jesus da govesat voar ar plaç,  
 Ha davantach he deveus bet, ar yec'het;  
 Calz a destou a voa eno assamblet.

Enfin, Christenien, n'en deus nep sort clenvet  
 Na nep sort accidant na recevont ar yec'het,  
 Pa en em voestlont ha pa rentont o homach  
 Da Santes Theclâ en ne c'hos hermitach.

Na vezet den incredul eus a guement-man,  
 Penos e rer miraclou bras er plaç-man;  
 Brec'h va Doue a so hir hac a dap partout :  
 Malheur d'an nep a zispriso e c'hallout.

En hano Doue Christenien, me ho suppli,  
 Paour ha pinvidic, da zont da gonsideri  
 Penos eo poent deomp, mar pretantomp jouissa  
 Eus a c'hloar ar Sænt, en em gonvertissa.

Buez ar Sænt, qercoulz hac ho miraclou,  
 Hon avertis da chanch hon actionou.  
 Ne vo curunet en Env gant Doue hon Tad,  
 Nemet ar guir binijen hac an œuvrou-mad.

Courach eta, courach, va breudeur christenien;  
 Chanchomp buez ha greomp oll pinijen;  
 Hennes eo ar voyen da veza oll recevet,  
 Goude ar vuez-man gant ar Sænt ha Sæntezet.